


1070^u

SON

POTRED AR SKOL



443

1.

Ni a zo pôtrez vihan a vez e skol Goulien (*bis*)
O klask skiant ha furnez da zanka 'barz hor penn.

DISKAN.

Ni ia en dro
Dizoursi braz ha dinec'h,
Ni ia en dro
Dizoursi braz ha dinec'h ato.

2.

Abredik diouz ar mintin — da zeiz heur pe vardro
E teu hor mamm da choual : « Allo ! Iannik var-zao ! »

3.

Ha kerkent en eur roc'hat e savomp a ruillou,
E frottopp hon daoulagad, e lakomp hon otou,

4.

Draillet eur pennad *Pater* — hag eur pennad *Ave*
E lounkomp eun tam souben pe eur banne kafe.

5.

Neuze dre bep seurt amzer, pa vije erc'h pe c'hlao
Ep gina nag damanti, krog en hor sac'h, ha iao !

6.

Er goanv pa vez re ien, ha ruz-tan ar friou
Ne jomer ket da dortal var c'horre an hentchou.

7.

Goulskoude forz-gwechennou e chommeur eun tammik,
Da derri lennou sornet o c'hoari rinklaïk.

8.

En anv pebeuz plijadur mont dre ar parkeier
Ha klevet al laboused o kana d'ho C'hrouer !

9.

Pa vez re dom an eol da zeski kenteliou
E vez c'hoant braz avechou da jom da glask neizou.

10.

Allas ! tad-koz a lavar : ar re ne zeskont ket
A deu hir ho diskouarn evel an azennet !

11.

Setu ne vankimp biken, ep damant d'ar boân
Ni deï d'ar skol, pa rankfemp bale var hor c'hrabân.

12.

Er skol pebeuz cholori, pa gommans ar mestr-skol
D'ober dikté ha kalkul, hag a bep seurt traou-drôl !

13.

Al lecture, an dessin, histoar ha jeographi
Ha dao er meaz d'an daoulam da c'hoari patati.

14.

Da c'hoari terri 'r jadenn, — da c'hoari bastotû
Galoch, kanettennou, toupi ha piti-kû.

15.

Ni zonz eo eur gwall vicher — evid hor mistri keiz
Chom da ziuouall ac'hanomp, ha chouka 'pad an deiz.

16.

« Va Doue, 'n ho paradoz, grit dezho 'r gurunen
» Ken braz, ken teo, ken pounner ken a blegint ho fenn. »